

Fañch an Uhel (Plouared 1821 – Kemper 1895)

Yann Kerglogor, ar haner baleer-bro.

Bet embannet e 1891.¹

Modernnaet eo bet an doare-skriva.

A mon ami Ernest Renan

I

Ar haner koz baleer bro
Ah a-dre ar mêzou en-dro,
Pa vez an amzer kaer pe fall,
Hag en e dorn² e vaz kargal.

Diroget e' e dillad,
En e dreid 'zo³ eur botou-koad,
E varo a zo hir ha gwenn,
Hag ive e vleo, war e benn.

War e benn a zo eun tok plouz,
Ha war e geigneur zah ler rouz,
Miret abaoe an amzer gaer
'Oa soudard d'an Impalaer ;

An hini braz, Napoléon,
En-devoa kalon eul leon,
Hag en-devoa heuillet pell, pell,
Bepred en tan hag en brezel.

Ha c'hoaz e verve e lagad,
Ar soudard koz, ar soudard mad,
Hag e krie : « Viv' l'Empereur ! »
Pa gomzed euz e genvreudeur.

E ano 'oa Yann Kerglogor,
Ha dalhet mad em-eus eñvor
Euz anezañ, euz e werziou,
E gontou leun a vurzudou.

Pa veze an douar skornet,
Ar parkou a erh goloet,
E tegoueze Kerglogor goz
Er maner, da abardaez-noz.

Ha pa veze gwelet du-hont,
En penn an ale vraz o tond,
Ar vugale 'grie 'n eur vouez,

¹ kargal : kargell.

² e dorn : ne vez ket greet ar hemmadur D/Z e tregerieg.

³ 'zo : tergerieg : ez eus

(Me ma-unan 'oa en o zouez) :

« Setu o tond Yann Kerglogor !
Hag e redem da doull an nor,
Da degemer ar haner mad,
Da dougen dezañ e zahad.

Neuze Kerglogor , e benn noaz,
A ree da genta sin ar groaz,
Hag en e zorn gantañ e dok
E lare, kent moned a-raog :

« Kement 'zo en ti, Doue d'o miro ;
Kement 'zo er-mêz, Doue d'o honduo ;
Kement a dleom pedenni evito,
Doue d'o delivro⁴ ! »

Roit ho paz hag ho sah ler,
Yann goz ; gwall-rust e' an amzer ;
Deut da domma e-tal an tan,
Da hortoz ma ve aozet koan. »

Hag a-neuze ma doulagad
War e zah ler 'veze dalhmad,
Rag eno e oa teñzoriou
A daolennou, gwerziou, soniou.

Goude koan hag ar pedennou,
'Veze tennet an taolennou
Euz ar zah ler, neuze kerkent :
On Zalver, ar Werhez, ar zent.

Hag eskibien, hag ebestel,
Hag a bep seurt tud a vrezel,
Oll livet koant ha renket mad,
Plijadurez on daoulagad.

Hag an den koz a gomze stard,
'Vel eur jeneral d'eur soudard,
Hag e honeze ar viktoar,
Karget a enor hag a hloar.

Neuze, 'kane dim buheziou
Ar zent euz Breiz, o burzudou :
Sant Eflamm, santez Enori,
Sant Tual ha sant Goneri ;

Ha sant Erwan, mignon ar paour,
E garantez gwelloh 'ged aour,

⁴ Doue d'o delivro : notenn gand an oberour : Setu aze gwir gomzou ar haner koz, a-raog mond ter en ti.

Ha sant Herve, ar haner dall,
Sant Kireg, ha kalz a re all ;

Sant Weltaz, patron ar chas klañv,
Sant Tudi ha sant Laouenan,
Sant Herbot, 'r sevel dienn,
Sant Gwenole ha santez Gwenn ;

Sant Jili ivez, gand e had,
Sant Tegonneg, 'ra charread
Oll vein e di gand eur bleiz loued,
En-devoa e azen debret.

Kalz c'hoaz a re all, rag sent Breiz
'Zo dre oll aneze a-leiz,
Ha 'vid pep kleñved ha pep poan
Ar horv, ar spered, 'zo unan.

Goude ar revu⁵ tremenet
Hag ar buheziou kaer kanet :
« Kerglogor, c'hoaz eur gontadenn,
Da ober c'hoarzin, pe aouenn⁶ :

« Jeanted ha kornandoned,
Ha tud bet troet en loened,
Majisianed, sorserien,
Tud-vleiz, dragoned a zeiz penn ;

Priñsed ha priñsezed feyet⁷,
En eur hastell en êr dalhet,
En eur ger, an oll burzudou
A laka ar bobl 'n e gontou. »

II

Neuze, eur hef-tan en e dorn,
Kerglogor dane e gorn ;
An oll en-dro a dave-mik,
Ha goude menna⁸ eun tammig :

« Selaouit oll, mar hoh-eus c'hoant,
Hag e klevfet eur gaozig koant,
Ha nan eus enni netra gaou,
Mez, marteze, eur ger pe daou. »

Eur skudellad jistr 'n e gichenn,
Evid distaga e lañchenn,
Aezet war eur skabell goad,

⁵ revu : ar weladeg.

⁶ aouenn : aon.

⁷ feyet : boemet.

⁸ menna : mennoud.

En korn an tan, ar honter mad

Distage neuze, penn-da-benn,
Eur gaoz d'ober c'hoarz pe aouenn.
Setu amañ, e berr-gomzou,
Unan euz e gaerra kontou.

Eur Roue koz, klañv, trist-meurbed,
Hag e oll izili skornet ;
E daoulagad leun a daerou,
Hag e galon leun a gañvou,

A hirvoud gand keuz d'e halloud,
D'e yaouankiz, eet en o rout ;
Doktored, majisianed,
N'hellont rei dezañ ar yehed.

Hag eun den koz a lar neuze,
Eun den a gant vloaz marteze :
« N'eus 'med Evnig ar Wirionez
'Ve gouest da yac'haad ar rouanez !

Eur zell hepken hag eur zonig
Euz al labous-se ken koantig
A diskar glahar ha kleñved,
A ro yaouankiz ha yehed. »

Ar Roue koz a lar neuze :
« Red e' din kaoud al labous-se !
D'an hini hen kavo, ma merh,
Ma muia-garet, koant ha gwerh ! »

Ha setu a-neuze kerkent
Tud a beb rumm da vond en hent.
Ha priñsed ha jeneraled,
Labouerien, artizaned.

Mez allaz ! nikun ne distro,
Rag oll e kavent ar maro ;
Hag ar Roue 'zo klañv bepred,
Hag an oll a zo glaharet.

Neuze, eur mesaer bihan,
Euz eun ti-plouz a-draoñ al lann,
Melen e vleo, lemm e lagad,
Ah a ivez, ar paotrig mad.

Evid sikour e gerent paour,
A gare dreist arhant hag aour.
Kimiadi 'ra euz ar Roue,

Ha mond neuze, en gras Doue.

E dad 'ro dezañ pemp gweneg,
Hag e vazig dero penneg⁹ ;
E vamm 'ro eun dousenn krampouez,
Ha c'hweh vi poaz, euz he folez.

Bale a ra, bale a ra...
Kaloneg, heb aon a netra ;
Aliez e tremen an noz
En eur park, pe eur gleuzenn goz.

Eun deiz, e-pad m'oa azezet
E-tal eur feunteun guzet,
Indan eur vodennig gwern glaz,
Poultret oll hag ivez skuiz-braz,

Da debri eun tamm bara du,
Eva dour, mond arre¹⁰ diohtu,
Setu o tond eur verienenn,
Eur big hag eul louarn lost gwenn ;

Hag e houlennjont peb a damm.
N'en-doa ken euz krampouez e vamm,
Nemed unan, hag he rannas
Gand an tri loen, hag e laras :

« Loenedigou Doue, dalit
Lod euz ar pezh em-eus ; debrit,
Rag naon hoh-eus, war a welan,
Ha zeblant zoken beza klañv. »

« Trugarez ! 'laras al loened
Penamedout 'vijem marvet,
Gand ar gwall naon ; pa vi nehet,
Goulenn, hag e vi sikouret. »

« Hag a zo mad, hag a zo kaer ! »
'Laras neuze ar mesaer.
Ha da vond en hent a-nevez,
Da glask Evnig ar Wirionez.

Muioh kaloneg 'oa bremañ,
O weled 'oa a-du gantañ
Loened keiz an Aotrou Doue,
Hag e soñje : Mar ben¹¹ Roue !...

⁹ e vazig dero penneg : e benn-baz dero.

¹⁰ arre : adarre.

¹¹ Mar ben : mar bezen , ma vezen

En eur ger, evid diverrañ,
Rag hir a-walh e' ar gaoz-mañ,
Goude kalz a boan, a labour,
Daoust d'an heol, d'ar skorn ha d'an dour,

Sikouret gand an tri loen mad,
A deue, p'o galve, timad.
Hag hen tenne a bep pleg fall,
Hag hen mire euz a beb gwall,

E teuas a-benn, evuruz,
Da dapoud al loen burzuduz,
Ha d'hen degas, 'n e gaoued aour,
D'ar Roue koz, ar monark paour.

Ar Roue, kerkent m'hen gwelas,
A zavas e benn, a hoarzas.
Ha pa hen klevas o kanañ,
'N em lakaas da ganañ gantañ.

Ha setu-eñ leun a yehed,
Laouen hag evuruz meurbed.
Ar mesaer, ar zun war-lerh,
Eureujas ar briñsez e verh.

Hqag e-pad eur miz penn-da-benn,
E oe festou, goueliou laouen,
Koulz d'ar paour 'vel d'ar pinvidig,
'N eur ger, eun eured magnifik.

Ma zad-koz a oa keginer,
Ha me a oa o trei ar ber,
Em-boa bet eun tamm, eur bannah,
Hag on deuet amañ d'gonta dah¹².

III

Me 'zeloue ar honter mad,
sioul, ha warnañ ma daoulagad.
Ha 'pad an noz, e varvaillou
A welen c'hoaz, em huñvreou.

Ha bremañ, pa'z on deuet koz,
E soñjan c'hoaz enne, beb noz,
Em gwele, pa ne gouskan ket,
Gand keuz d'am amzer termenet.

Hag em-eus bet lakaet em penn,
Kent ma vefont maro da viken,

¹² dah : deoh. Notenn, e galleg, gand an oberour : Nos conteurs terminent ordinairement leurs récits par cette formule ou quelque chose de semblable. :

Dastum ar gwerziou, ar hontou,
Oll blijadurez on zadou.

A gaver c'hoaz, miret en penn
Ar re n'ouzont skriva na lenn,
War ar mêziou, en tier plouz,
Leh 'ver tud simpl, pell euz an trouz.

E-pad tregont vloaz, pe war-dro,
Em-eus o hlasket dre ar vro,
Hag emaint bremañ en levriou
Leh e vevfont hir amzeriou.

O ! kontou koz, gweziou, soniou,
A chalm tud Vreiz, 'n o nozveziou,
Magadurez skiant ar paour,
C'hwi 'zo kant gwech well' 'vid an aour !

Hag a boaniou 'h-eus konsolet,
Poaniou ar horv pe ar spered !
Kontou burzuduz on zud koz,
Warnoh e roan ma bennoz.

Plouared, miz Gwengolo 1891.